

Dizano : Tri barzoneg

Bugel Itron Varia Sklêrded, en Skol Wengamp.
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Taolenn

Ar bara hag ar bokedou roz.

Ar rozenn.

Kalon eur vamm.

Ar bara hag ar bokedou roz

War don : Gwerz koz Sant Erwan

En eur harter euz a Vro-Hall
E oa o chom, amzer gwechall,
Eun aotrou braz, dezañ kalz aour,
Mez gwall-didruez ouz ar paour.

E verh (n'en-devoa nemeti),
E verh a oa anvet Mari ;
Dre hras Doue, honnez avad
A oa enni eur galon vad.

A-vihanig, an dimezell
A oa bet eur plahig santel ;
Pa wele pevien¹ 'toull an nor,
Dioustu he daouarn 'oa digor.

Bep sun, hag aliesoh c'hoaz,
E roe aluzennou braz ;
An oll bevien a yee d'he had
'Devoa bepred degemer mad.

An aotrou, er hontrol, siwaz !
A gomze oute 'vel ouz chas ;
Ha, dre ze, pa veze er gêr,
Eh eent 'n eur grenañ d'ar maner.

'Vid harz e verh ken karanteg,
Da zikour an dud ezommeg,
Eun deiz, en eur vond d'ar chase,
Gantañ e kasas an alhwe'.

Pa welas Mari ar bevien
Deredet da galsk aluzenn,
Da gambr ar bara e redas :
An nor a oa prenet, siwaz !

Eviti pebez kalonad !
Daerou a deu 'n he daoulagad ;
O ! ma hallje, da vihanna,
Kinnig deze freuz² e-leh bara !

Nann ; ne hell ket : el liorzou
Ne gaver c'hoaz nemed bleuniou.
« Mad ! emezi, pa n'eus ket freuz,
E fell din rei ar pezh em-eus. »

Ha stu-hi, a-dreuz ar porz,
O redeg buan d'ar liorz ;
Hebdale pell ema distro
Leun he daouarn a vokedo'.

¹ pevien : peorien.

² freuz : frouez.

Bokeodu roz 'devoa kavet,
Bokedou c'hwez-vad, brav-livet ;
« Pa n'eus, emezi, tamm bara,
Tud kêz, kemeret an dra-ma' . »

Ha dioustu, gand he dornig flour,
E ro eur rozenn da bep paour ;
Na kaerrañ burzud ! peb rozenn
En bara 'zo cheñchet souden.

Kelou euz eur burzud ken braz
Dre ar vro buan a redas ;
Dre-oll 'veze klevet dalhmad
Meulodi an dimezell vad.

He zad, ken kriz bete neuze
En-keñver oll bevien Doue,
'Oe souden e galon cheñchet
O klevet 'pez oa degouezet.

Kalz arhant zoken a roas
Evid sevel eur gouent vraz :
Er gouent-se gantañ savet
Istor ar bara 'm-eus kavet.

Ar rozenn

Ouz ar beure ar rozenn,
Perlezet gand ar gliz-mae,
A lar d'an neb a dremen :
« Na koantig-oll ez on-me ! »

Da zerr-noz a rozenn,
Bet glaoig e-pad an de',
'Laro gand eun hirvoudenn :
« Ez a kuit ar Vravente' ! »

Kalon eur vamm

« Da vammig kêz a zo gwall-glañv,
Trouz ebed, ma bugel !
Kuita da votou-koad bremañ,
Ha dilez da hwistell. »

Ar bugel raktal a davas :
‘Kreiz an noz, an Ankou
Da gerhed e vamm a deuas,
Er houlz ‘ree huñvreou.

Huñvreou glan hag evuruz,
‘Vel on re d’an oad-ze :
Hag e tivunas dudiuz
Deiz war-lerh ar beure.

Ar pried hag e diegez
A skuille daerou kri’ :
Ar paour bihan gand levez
A ‘n em lak da hoari.

Ar vatez ‘deus gwisket dezañ
Eur zae du nevez-flamm.
« Ha galloud a ran-me bremañ
Mond da bokad d’am mamm ? »

« Ya », ‘laras e dad glaharet,
« Deus ganin, ma bugel. »
« Mamm, setu-me deut d’az kweled
Degad-in³, gra eur zell. »

Skouarn ar vamm baour ne glev ket
He bugel hirie :
D’e dad neuze ‘laras, nehet :
« Lak ahanon ‘n he gwele. »

Hag e dad a dougas ‘nezañ
War galon e vamm vad :
« Siwaz ! maro-mik e’, » ‘mezañ,
« N’hallo ken d’az pokad. »

Kalon e vamm a oa yen :
Mez ar bugel ‘laras :
« Mamm gêz, gra din eur hoarzedenn ! »
Hag ar vamm a hoarzas.

Hag ouz kalon domm he mabig
Heh hini ‘deus tridet :
Ken karet e’ gand e vammig
Ar bugel ‘deus maget !

(Bugel Itron Varia Sklêrded, en Skol Wengamp)

³ Degad-in : ?

